

CHANSON AR PLAC'HIC PAOUR HA FUR.

Var ton Fantic Caont.

Deiz mad dec'h, Fantic coant...
Mes pebes chanchamant !
Diveza m'ho quelis
Evoa fresq hoc'h invis ;
Mes abaoue, me gred,
Noc'h eus-hi quet chauchet.

Joa vras a meus ouzoc'h,
C'hoas em bijet muioc'h,
Ma vije ho quenet
Euu neubet decoret
Eus a netadurez...
Pardonit, va mestrez.

Na ellàn quet credi
E ve dre ziegi,
Qen neubet supposi
A ve dre loustoni
O cuelàn, plac'h yaouanq,
En ho lingeri fanq.

Anzavit din hep mez
Doare ho tiegez.
Paourante zo calet,
Mes n'en deo quet pec'het :
Lavarit din heb aon
Ha c'houi a vanq a zaon.

Autrou, e ty va mam
Na gafet quet un tam,
Nac arc'hant da breñan,
An dra-se zo goassa ;
Evelse n'en don quet
Da veza tamallet.

Ne ve cavet em zy
Nemet teir scudel bri,
Teir loa goad, ur bodez,
Ur podic da glasq lèz,
Diou scaon, un tabore,
Ur banq hac ur guele.

Cavet e ve ouspen
Un tamic chaoudouren,
Ur gos cramailleren,
Trebez, pilic, pladen,
Evit oza crampoez,
Mes nonpas alies.

C'hoas ur c'hribinou mad,
Pa ve lin da gribat,
Daou gar evit neza,
Travouil da zibuna,
Tamouez da oza bleud,
Pa vez guerzet an neud.

N'on deus quet pemp guennec,
Da gaout eun tam blonec,
Nac un dornad olen
Da zallan ar zouben,
Ha evit ober tan
Hon eus ur gargic lann.

Cetu aze, autrou,
Invantor va güirion ;
Ne neus quet er c'hontre
Ur plac'h qer paour ha me ;
Mar clasquit ar madou,
Chenchit tu d'ho pajou.

Var gementse, Fantic,
N'en doc'h qet pinvidic ?
Mes ho comzo güirion
A ravis va c'halon :
Seulvi ma ho clévan,
Seulvioc'h ho caràn.

Me zo ur marc'hadour
Dre zouar ha dre zonn ;
Me meus aour hac arc'hant,
Ha demeurans charmant,
Gant zourci vras menblet,
D'ho receo, pa guerfet.

Tri pe bévar bloas so
E valean dre'r vro
Evit clasq ur pried,
Ha n'em eus qet cavet
Ini d'am zantimant,
Nemedoc'h, plac'h prudent.

Lavarit d'in eta
Ha me a dle conta
Da gaout ar blijadur,
Dre voneur dreist natur,
D'ho quelet oc'h orni
Dre ho quenet va zy ?

Mar be contant va vam,
Me na zifferin tam,
Dre vemes carante
Deomp hon daou he bete ;
Va c'halon zo mantret
Mar bec'h discouviét.

Deiz mad, greg enorus,
Mam vad, fur hac eurus ;
Mam d'eur verc'h enorabl,
Caër, modest, agreabl,
Am ho evit pried,
Ma n'am refuset qet.

Birviquen ne gredàn
Autrou vec'h deut amàn
Evit ober goulén
Demeus eur vergeren
A bep tra dibourve,
Sepet a burete.

Sellit en pezh castel
E chom au dimezel
Guelit en pezh costez
Ar brassa paourantez,
Evit ho tistrei
Deus an nep fantazi.

Mam, eus ho tieguez
Em eus anaoudeguez ;
Var gementse tevomp ;
Hon tri en em glevomp
Da vevan en hon èz
Dre va finvidiguez.

Autrou na dleàn qet
Refusi ho reget,
Dre ho tisinteres,
Er choas eus ur vestrez,
E zoun zur a rentfet
Euruz ma merc'h caret.

Dre o friedelez
Eurus voent assembles ;
Douçder ha yaouanquis,
A zo guell avichou
Eguet an oll vadou.

CONCLUSION.

Dre'r zon-mâ é veler,
Var ar mezh hac en qer,
E zec, ar barfetet
A blich mui d'ar voaset,
Rac-se, merc'het ar vro,
Bezit modest ato,
Hac e cavot pried,
Evel mo tezired.

FIN.